



Ginivelez ar Mabig Jezuz e chapel Sant-Sebastien, Saint-Ségal (Finist.)

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 76 (Miziek-Mensuel)

Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

KERZU 1954

TAOLIT EVEZ MAT

Diwar an niverenn-mañ, evit kement a sell ouz ar c'houmanañchou, adkoumanañchou, chench adres e vo ret skriva ha kas an arc'hant da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Eur bern a zo ha n'o deus ket paet o c'houmanant 1954 ha meur a hini o c'houmanant 1953.

Arabab d'eoc'h kredi e c'hell « Bleun-Brug » beva gant aer an amzer. An em c'houfennit eta ha paet eo ganeoc'h ho kourmant. Ma n'eo ket kasit raktal dre ar post, d'an adres a welit uheloc'h (hep lakaat ano all ebet nemet : **BLEUN-BRUG**) :

Koumanant ordinal 500 lur.

Koumanant a enor 600 lur.

Koumanant madoberour 1.000 lur.

AR SKRIDOU a zo da gas evel araok, da :

M. l'Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

AR SKODENNOU IZILI ha kement a sell ouz ar skol dre lizer a zo da veza kaset da :

V. SEITÉ, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère). — **C.C.P. 544.22 Nantes.**

SKOAZELLER : 200 LUR — EZEL : 500 LUR — MADOBEROUR : 1.000 LUR.

TAOLENN

Kalanna an Ao. Perrot	1
Noz Nedeleg an ostiz fall, gant V. F.	2
Nedeleg ha deiz kenta 'r bloaz, gant Y. ar Gow.	5
Nouel Berc'hed	7
Va c'hornad kenta, gant Gwenaël	8
C'hoarzomp	9
Buhez ar B. B.	10
Keleier	13
Kelaouennou	16
Bleun-Brug Landi	17

« Lizeri Breuriez ar Feiz ».

Beo atao « Lizeri Breuriez ar Feiz » bet savet er bloavezh 1844, ouspenn kant vloaz a zo. Setu aze moarvat ar gelaouenn, gosa skrivet e brezoneg peñ da-benn ha n'eo ket aet c'houz da gel. Evit lida ar c'hantved e oa bet savet eun niverenn kaeroc'h da gonta istor ar gelaouenn. Er bloavezh 1944 e veze ingalet 20.000 skouerenn bep daou viz netra nemet e eskopti Kemper hag eun nebeudig skouerennou e parrezioù eskopti Gwened evel Gwiskriv, Roudoualeg. Pebeus labour tavoudus o deus graet al lizeri-se epad kant vloaz evit derc'hel beo ar voazamant da lenn e brezoneg.

Er bloavezh 1952, e teuas chenchamant stumm er gelaouenn, kaeraet e voe gant eur golo a-liou ha skeudennou : siouaz ! ranket ez eus bet ivez rei eul lodenn eus ar gelaouenn d'ar galleg.

An Aotrou Chaloni Grill a zo bremañ e penn, eur beleg bet troet evit ar wech gant ar brezoneg hag en deus poaniet kement, en amzer ma oa ensellour ar skolioù kristen e eskopti Kemper, da lakaat studia ar brezoneg hag istor Breiz. Pennadour eus ar re vrasa a gaver el « Lizeri ». En niverenn ziweza e kaver unan savet gant an Tad Trebaol eur stourmer all, gredus ha gouiziek, o koza bremañ « en eun tu bennak e Bro-C'hall ». Evit reseo « Lizeri Breuriez ar Feiz » skriva da : Chanoine GRILL, impasse de l'Odel, Quimper.

133688



Kalanna an Aotrou Perrot da Lennerien Bleun-Brug

« Koumoul du a zo war Feiz, koumoul du a zo war Breiz, gouest da lakat eun den buan a-walc'h da fallgaloni ; met n'eus koumoulen n'eus forz pegen du e vefe, hep eur vevenn arc'hantet gant an heol a zo a-dreñv : ar c'houmoul du a dremeno ; ar Feiz hag hor Breiz e skedo. »

« Hor sent koz eo o deus roet d'eomp eskell da nijal dreist spenn ha fank ar bed-mañ etrezek ar pezh a zo mat : Mil bennoz Doue d'ezo. »

« Dihuna a zo mat, met n'eo ket a-walc'h ; ret eo labourat ha labourat a-zevri. »

« Hor youl eo gwelet kement hini a gemero perzh er Bleun-Brug, o tistrei d'ar gêr, birvidikoc'h en e greiz, ar garantez evit e Zoue hag e vro. »

« Mont er Bleun-Brug ne vir ouz den da welet ar vad a ra e nesa, na da rei dourn d'ezañ zoken pa vez ezomm ; Karomp dreist pep tra ar wirionez, rak da heul ar wirionez e teu an urzh ha da heul an urzh e teu ar peoc'h. »

« Goueliou ar Bleun-Brug, tamm ha tamm, a daol sklerijenn war ar vro hag a ro d'ar Vretoned dianket youl da gerzout a nevez war roudou o zadou. »

« Yez ha dilhad Breiz eo traou ar vro, traou eta hag a zo d'an holl hag a dle an holl harpa pe difenn koulz pe welloc'h eget traou an unan. »

« Ne vevimp evel pobl nemet derc'hel a rafemp da vad d'hor brezoneg. An dra-se a zo sklêr : Arabab da zen hen ankounac'haat : Hep brezoneg n'eus Breiz ebet. »

« Hor c'hoant ?... Gwelet ar Vretoned oc'h en em glevet evel breudeur, hag o poania holl a-unan, evit ma paro war hor Breiz karet deizioù laouennoc'h... »

Yann-Vari PERROT,

Tad ar Bleun-Brug.



Noz Nedeleg an ostiz fall

Eur wech e oa... ha ken buan ha tra e chom an holl da zelaou ar c'honter. Va zad koz a oa savet c'hoant gantan da vont da foar an Nec'h, nemet ne blijte ket kalz gantan ken mont e-unan en hent hag e oan bet stropet da vont d'e heul. Edomp o treuzi ar Menez Are, e-biou da Roc'h Trévezel. En-dro d'eomp brugeier ha lanneier fall, moug ha rouz ; a gleiz hag a zehou livenn-gein ar menez o klask en em eeuna, mell divell, henvel re dost ouz eun tonn divent a vein ruilhet deuet da darzi ha da zonna.

— « Aman avat, eme-ve d'am zad koz, ne goustfe ket ker an troatad douar da zevel tiez nevez ! »

— « Anavezet am eus koulskoude, skoachet étre an diou roc'h vras a welez, dismantrou eun ti koz kousez en e boull en amzer va bugaleaj... »

Ac'hanta ! a zonjis ennon va unan, setu tad koz gant e istoriou ; ha me talmolodi e kichen tad koz, paket mat ar valliñ endro d'am divesker, rak an avel viz a oa trenk awalc'h, miz Here anezi, digor bras va diskouarn hag ivez moarvat va genou eun disterig. Araok Montroulez e oa c'hoaz eur pennad mat a hent da ober hag ar Vorian n'oa ket gwall zillo.



Amañ, dem war gern ar menez, e oa gwechall eun ostaliri gant eun ostiz hag eun ostizez. Bro, ti ha tud a oa brudet fall ha ne veze ket stank ar pratikou dreist-holl goude ar c'huz-heol, nemet hini pe hini kollet e-touez ar vrumenn pe aet skuiz gant an hent ; diayezidi ive gwech pe wech, ha ne ouient netra diouz doare ar vro. Bep bloaz, ne veze kont da vare ar foariou pe ar pardonioù, nemet eus tud laeret hag awechou gwall bistiget da heul ; ne gredent treuzi ar Menez nemet a-zaouioù d'an nebeuta.

Eur bloavez, da noz Nedeleg, setu daou veajour o chom a-zav dirak an ostaliri hag o vont tre. E-kreiz ar goanv edod, yudal a rae an avel hag an noz a zave eus ar stankennou da veuzi kern ar menezioù d'o zro. N'oa ket tres an dienez war ar veajourien, tres ar baourentez ne lavaran ket, tres ar skuisher ivez.

N'oa nemet an ostizez er gêr.

— « Lakit eur chopinad gwin ruz d'eomp » emezo.

— « Savomp ar re-mañ ha yec'hed d'an holl. »

Paea a rejont ha yao gant an hent adarre, a-benn d'an avel.

Nebeut amzer goude e tigouezas an ozac'h er gêr.

— « Ac'hanta ! Tro vat az peus graet ? » eme d'ezañ ar wreg.

— « Tro fall kentoc'h : eur vaouez koz o vont d'ar pellgent da Itron-Varia ar Releg em eus batet, n'ouzoun ket hag harpout a ray... c'houec'h real ha daou a oa ganti ! »

— A ! ma vefes bet distro eun tammig kentoc'h ! Daou e oant ; evet o deus eur chopinad gwin ruz. Ar mestr moarvat en deus lavaret d'egile : — « Te a baeo Yann ? » — « Eus a belec'h, Aotrou, n'am eus gwenneg ! » Ha neuze an Aotrou en deus tennet eus e vantell eur yalc'h ken hir ha va brec'h, leun a beziou acur !

— « Mil gurun ! E pe du int troet ? »

— « Warzu Komana. N'int ket aet a bell c'hoaz. »

Paka peg a ra an ostiz en e vantell kroc'hen-dañvad, troue'ha kuit diwar hent ha skei berr a-dreuz al lanneg warzu hent Komana ; en o raok e vefe e korn-tro ar broc'h. Puchet eo bremañ adreg an torr-kleuz ; dre amañ e rankont tremen, hag hep dale. C'houeza a ra en e zaouarn kropet.



An daou veajour a zache gwella ma c'hellent, ésoc'h eo diskenn eget pignat. « A fors da vale e raent hent hep dale.

« Ha pa ne gouezent ket e vezent kuit da zevel. »

Piou e oant nemet an Aotrou Doue ha Sant Yann. Eur wech bep seiz vloaz emañ ar c'hiz ganto da ober eun dro vale e Breiz, netra nemet evit gwelet penaos e veze heuilhet noz Nedeleg.

— « Yann, eme an Aotrou Doue, dastum 'ta ar westign-se. »

Eun tamm gwestign fall, leun bri ha leun gaoe'h-kezeg, kollet gant eun trafiker bennak eus a Landi moarvat.

— « O va Doue, setu aze eur gavadenn avat ! Petra ar foultr a rin-me gant ar c'hoz gwestign-se ! »

— « Dastum anezi atao, marteze e servijo d'eomp. »



A-greiz pep kreiz eun dén o tifoupa eus an tu all d'an torr-kleuz, eur gontell zigor en e zorn.

— « Va zud vat emezañ, ar yalc'h pe ar vuhez ! ! !... »

Ken prim all an Aotrou Doue a laka ar westign d'ezañ ouz e benn ha kerkent ha gwestignet e tro hor c'hianfard da azen bleñvek, hir-skouarniet.

— « Adreñv-ta, mourig fall ! Sav war e gein, Yann ! »

Yann a zav war gein an azen renet dre ar westign gant an Aotrou Doue.



Araok en em gaout e Komana, setu ma kavjont war o hent eur miliner o porteza hep karr na loen, eur zac'had bleud war e choug.

— « Gwall zammet oc'h, dén paour ! Pell ho peus da vont evelse ? »

— « Betek ostaliri Roc'h Trevezel emañ o vont ha krec'h a zo gant an hent, m'am befe bet eun azen evel doc'h, ya ! »

— « Ma karit e vo feurmet d'eoc'h. Bep miz e lakoc'h daou wenneg en eur yalc'h. A-benn seiz vloaz amañ e tistroimp davedoc'h, hag e kemerimp yalc'h hag azen. Akord omp ? »

— « Akord ! eme ar miliner, war eur marc'had evel hennez e kemerfen, n'eo ket eun azen eo, met daou ha tri. »

— « N'ho po ket kalz a zoursi da gaout gant ar boueta ; figus eo ha figus n'eo ket, ne zebri na foenn na panez, eur wech an amzer restachou bara kraz. Beva a ray diwar e boan kentoc'h c'hoaz eget diwar bara, roit labour kalet d'ezañ da ober. »

— « Gant labour kalet n'oun ket nec'het ; er vro-mañ n'eus nemet sav ha krec'h, n'eo ket brao evit azen eur portezet, gant an henchou doun e ranko mont evel ma 'z an va-unan. »

— « Gwell a ze, yac'hoc'h a ze ne vo ken. Eun dra hepken am eus da lavaret d'eoc'h : Ha pa zebri ha pa ne zebri ket, en an' Doue, n'it ket da ziwestigna anezañ evit digarez ebet, klevet eo ! »

Ar miliner a laka e zac'had bleud war gein an azen ha mont d'an ostaliri ha goude d'ar vilin ha c'hoaz en tu-mañ hag en tu-hont.

Diouz an noz e laka foenn en e rastell. Mat, gwir eo, ne ra van ebet an azen. Restachou bara kraz neuze ? Gwreg ar miliner a zo diredet d'ar c'hraou.

— « Penaos, a gav d'it e tebro p'eo gwestignet, tenn ar westign ta ! »

— « Arabat eo ! Ar re o deus e feurmet d'in o deus difennet groñs e ziwestigna. Pe e tebro pe ne zebro ket, gwestignet e chomo. »

Hag e rankas an azen poania ha diboania hep debri kazimant netra. Dize-c'het gant an naon, devet gant ar riou, dindan a bep seurt amzer, mont atao ouz ar wakol er saviou krenn, hag hep ehan, an taolioù o koueza evel kazarc'h pa venne chom a zav da denna e alan ; ya « lopet evel azen ar miliner », setu buhez paour hon azen.

Seiz vloaz e padas an abadenn, seiz vloaz hir evel lost eur steredenn lostek. Ar miliner avat a yae mat ar bed gantañ. Bep miz e lakae daou wenneg e

yalc'h an azen, hag en e yalc'h d'ezañ e unan e lakae peziou gwenn ha melen. Dere'hel a reas penn da benn d'ar gourc'hemennou roet d'ezañ ; diouall a reas dreist-holl da ziwestigna e azen.

✱

Tremen a reas ar seiz vloaz. An Aotrou Doue ha Sant Yann a zistroas da noz Nedeleg adarre da gemeret an azen endro hag ar yalc'h.

— « Bennoz Doue d'eoc'h ! eur bennoz Doue bras ! sikouret oun bet gant hoc'h azen, bremañ em eus peadra da brena unan all. Ma karit e roin d'eoc'h eun dra bennak muioc'h eget ar priz feurm. »

— « Nann, nann ! va dén mat ; roet az peus d'ezañ da zibri ivez. »

— « N'oa ket bras an dispign gantañ : tammou kreun louedet a vefe bet slapet d'ar yér. Dalc'het am eus d'am gér avât ha n'am eus ket tennet digantañ e westign gwech ebet. »

— « Mat hoc'h eus graet. »

✱

Hon daou veajour a gas ganto an azen hag a join a-zav en ostaliri da eva eur banne. An azen a oa stag ouz eur ruilhenn, er mēz, evel just.

— « Mar karit e taolin eun tamm foenn d'hoc'h azen ? »

— « N'it ket d'en em jala gantañ. »

— « Sellit 'ta, tudou, daoust ha n'eo ket c'houi eo a zo tremenet dre amañ, seiz vloaz zo ? Er memes poent bloaz 'oa ; yudal a rae an avel evel hirio. Kom-prenit 'ta am eus kollet va gwaz abaoe an dervez-se, ha kelou ebet anezañ n'eus deuet d'in. »

— « Marteze, ostizez, edo o vont gant eun hent fall bennak ! »

— « O livirit d'in, mar gouezit, petra eo deuet da veza. »

— « Ho kwaz ?... Aze emañ dirak an nor. »

Redek a ra er mēz ; ne wel nemet an azen, stouet e benn, o sellet outi gant daoulagad melkonius.

Dont a ra endro en eur ouela dourek.

— « N'eus nemet hoc'h azen... Mont a ran da deurel foenn d'ezañ. »

— « Mar karit. »

Mont a ra eta ha dont endro ker buan all.

— « Ne fell ket d'ezañ debri foenn. Hag emañ aze o c'hourichal, o fringal ; sevel a ra en e zav o klask briata ac'hanoun gant e baoiou araok hag o klask pokat d'in. »

— « Sell 'ta ! »

Hag int er-mēz.

— « Ma kerfen e ziwestigna, marteze e vefe êsoc'h d'ezañ debri. »

— « Ya, tennit e westign digantañ. »

Tenna a ra ar westign... o burzud ! Mennout a ra an ostizez kaout eur fallaenn... Dirak he daoulagad an azen a dro da veza he gwaz !

Leun-zaelou e zaoulagad, e lamm an ostiz da bokât d'e wreg. Goudeze e tro da zaoulina dirak an Aotrou Doue ha sant Yann met n'edont mui war al lec'h.

War an daol, e sal-kegin an ostaliri o devoa lezet eur groaz ! eur groaz graet gant ar gwenneien en devoa gounezet an ostiz epad ar seiz vloaz-se a binijenn, o tougen sac'hajou pounner dre henchou doun ha meinek ar Menez.

« Sklér 'oa ar pezh a lavare ar groaz : Ret eo gounit ar baradoz diwar ar boan. An arc'hant n'eus gounid ebet evidout gantañ m'az peus e laeret ; diwar c'houezenn an tal eo e rank beza gounezet. »

An Aotrou Doue ha sant Yann a oa aet kuit hep ober sarmon ebet ; sarmon awalc'h 'oa ar groaz-se war an daol.

**Diwar « Teñzor ar c'hoñchennoù » gant H. Pourrat
renket gant V. F.**



Nedeleg ha deiz kenta 'r bloaz

Dre ma tostae gouel Nedeleg e veze laouen ar vugale o soñjal er pezh o divije digant ar Mabig Jezuz. Nag a huñvreou kaer am eus-me grêt neuze, bihanik-tre ! Bemnoz, a-barz mont d'am gwele, e peden ar Bugel-Douc da rei d'in eun taboulin, eur c'hleron pe eur c'hoariell-all bennak.

Hogen, pa vezen dizuj, e tigase ma maeronez d'in da zoñj e rankjen beza furoc'h pe ne gavjen netra em boutou antronoz noz ar Pellgent, rak ne blijje ket ar re vihan dizen d'ar Mabig Jezuz.

Dalc'hmat e c'houlennen pēnos e c'hellé hemañ diskenn e-barz an ti dre doull ar ziminal, hep en em zaotra gant an uzuilh. Ha derc'hent ar gouel, goude koan, ne ankouaen morze kempenn ma boutou da lakaat war an oaled klouar dirak an tan.

Antronoz-vintin, avat, ne baden ket gant ar blijadur, o kavout e korn ar c'houign, an teñzoriou am beze bet eus ar Baradoz : gwestell, chokolad, Mabouigou Jezuz sukr roz gourvezet e kavilli paper arc'hantet hag eur marc'hig karton war beder rodig koad, pe eun drompilh alaouret gant pichourellou gloan marellet en-istribilh outi.

Siouaz ! eun deiz, pa gavas d'am maeronez e oa deuet va skiant d'in, ec'h anzavas ouzin n'eo ket ar Mabig Jezuz a lakee an traou kaer ha mat-se e bouteier ar vugale. O c'hérent eo a ree kement-se evit ma vijent laouen da geñver deiz ginivelez Hor Zalver e kraou Bethleem.

Eur galonad a voe d'in eur seurt kelou hag, e-pad pell e chomis mantret gant an dristidigez. Pa glevis na oa nemet eur zorc'henn ar gredenn gaer-se a vagen e goueled va c'halon, e seblantas d'in e oa torret eun dra bennak em c'hreiz. E gwirionez, brevet e oa ennon an neudenn aour am stage ouz huñvreou dispar va yaouankiz tenera. Va c'herseenn genta a voe hounnez don ha c'houero war dreuzou dor va buhez o tigeri...

✱

Eun devez a levenez a oa ive an deiz kenta 'r bloaz. Kerkent ha dihun diouz ar mintin, e saven eus va gwele da heti ar bloavezh mat d'an zud hag am beze eun nebeud gwenneien da zelou mat diganto. Eun tamm kouign-amann a dapen c'hoaz war ar marc'had, rak eur wastell a veze grêt bep bloaz da geniver an deiz-se. Ar yontred hag ar moerebed a ziwar ar mêz, o tistrei d'ar gêr eus an oferenn, a veze brokus ive, ha goude m'hon deveze, va breudeur ha me, kinniget d'ezo hor gwella hetou, e roent deomp bep a dâmmig arc'hant evit merka ar bloaz nevez.

E-pad ar mintin, etre an oferenn genta ha kreisteiz, e teue, hervez ar c'hiz, peorien ha moused ar vourc'h, ar re-mañ daou ha daou peurliesad, da glask o delou mat betek toull-dor an ti. Hag hep ehan, e kleven ar memes komzou :

« Eur bloavezh mat 'zouetan d'eoc'h,
« Yec'hed ha prosperité
« Hag ar baradoz 'fin o puhe. »

Bep a wenneg a veze roet d'ezo hag e reent tro ar vourc'h e giz' se, o vont eus an eil dor d'eben. Pa ne gave ket digemer vat al lavagnoned a veze en o zouesk, e laoske hiniennou anezo komzou gros ha dizoare :

« Eur bloavezh mat 'zouetan d'eoc'h,
« Leiz ho ti a vernou... »
(Sonjal a reot bernou petra, respet d'eoc'h.)

Hag e skrapent kuit gant aon e vije lardet o diskouarn d'ezo. Difennet e oa bet ouzin gant va zad, mont da heul al lamponidi-se, ha ne vije ket bet brao d'in dizenti outañ. Aotreet e oan hepken da vont da heti ar bloavezh mat d'hor c'herent tost eus ar vourc'h, hag evit farsal eun tam-mig, e tibunen d'ezo, a-wechou, ar regenn-mañ a oa bet desket d'in gant va maeronez :

« Me zouhet d'eoc'h eur bloavezh mat,
« Yec'hed kreñv ha boued war ar plad,
« Kig bevin ha kig sall,
« Bara gwiniz e-touesk an doal,
« Kaol-pom en ho chardin,
« E-barz al liorz, pour hag irvin,
« Karotez bras ha panez krenn,
« Evit ma vo mat ar zoubenn,
« Sistr bemdez, hag a-wechou gwin,
« Hag ar baradoz d'ar fin ;
« N'eo ket da fin ar bloavezh,
« Met da fin ho pûbez !!! »

(Tennet eus dornskrid envorennoù **Yeun ar Gow**,
« E skeud tour bras Sant Jermen », a vo embannet dizale.)



NOUËL BERC'HED

VAR DON : *Jesu Redemptor omnium...* (an ton koz).

Kanomp Nouel a galon vat,
Da dud an ti eur bloavezh mat,
Eur bloavezh mat digant Doue,
Hag ar Baradoz goude-ze...

Setu ni erru breudeur ker,
Da gana kantik Hor Zalver,
Rak henoz ez eo bet ganet
Jezuz, Hor Mestr, Salver ar Bed.

Josef ha Mari benniget
O daou a gerze dre ar bed,
O daou a gerze dre ar bed.
O klask lojeiz na gavent ket.

Tost da Vetelem digouezet,
Lojeiz o devez goulennet,
Lojeiz, mar plij, a c'houlennant,
En an' Doue, pe 'vit arc'hant.

« Ni na lojomp ket a beorien,
« Met tudchentil ha beleien,
« En ti-mañ ne ve ket lojet,
« Nemet prinsed ha baroned.

« En ti-mañ ne ve ket lojet,
« Nemet otrouned ha prinsed,
« Nemet otrouned ha prinsed,
« Noblans ar roue pa ve ret ».

Josef a yee, a zeue,
Zelle ouz Mari gant true,
Ha Mari gerze gant he hent,
Brasoc'h he anken evit kent.

Eur verc'h yaouank a oa en ti,
Zelle trouezus ouz Mari,
« Mestr ha Mestrez, lojet Mari,
« Ho pet, mar plij, true outi » ;

— Matez vihan, laret d'i-me :
« Ha kompagrunez 'zo gante ? »
— Gante avat, ne welan dén,
« Met eun azen hag eun ejen. »

— Ma ho peus true ouz Mari,
« Kerzet 'ta buan daveti,
« Ha lakait-hi er marc'hosi,
« Eun dornadig plouz dindani » ;

« Mari, Mari, deut' ta en dro !
« Ar mestr a lavar ho lojo ».
Lakeet e voe 'n eur c'hraou dister
Digor d'ar glao, d'ar zeiz amzer.

Eun nebeudig plouz dindani
Hag eun dornadig foen warni,
Met pa voe erru hanter-noz,
Mari ne c'helle mui repoze.

« Josef, Josef, kousket oc'h c'houi ? »
« Pas, Mari, petra fell d'oc'h c'houi ? »
— Eun tamm goulou 'fot da Vari,
Hag unan eus mero'hed an ti. »

Gane ket c'hoaz ar c'hog d'an de,
Hag edo Josef war vale :
« Demat d'eoc'h c'houi, mestr an ti-mañ,
« Eur plac'h diganeoc'h 'c'houlennan ».

En ti-mañ n'ez eus ket mero'hed,
« Nemet unan anvet Berc'hed,
« Nemet unan anvet Berc'hed,
« Honnez ne c'helle ket monet.

« Honnez ne c'helle ket monet,
« N'he deus fri ne lagad ebet,
« N'he deus na fri na daoulagad,
« Na brec'h, na dorn da labourat. »

Berc'hed, Berc'hed, Berc'hed, deut c'houi,
Doue roy daoulagad ha fri,
Ha diouvec'h, ha daouarn d'eoc'h c'houi,
Da zikour ar Werc'hez Vari.

Berc'hed, Berc'hed, Berc'hed, deut c'houi,
Ho kouel a vo 'r rok he hini. »
Gouel Berc'hed 've e miz Genver,
Hini Mari e miz C'houevrer.

N'e ket en eur gampr alaouret,
Eo bet ganet Salver ar Bed,
Met en eur marchosi dister,
Na oa ennañ tan na splannder.

Eun el 'teuas eus an Neñvou,
Da zigas tan ha c'hoaz goulou,
Da zigas ha tan ha splannder,
Ha traou da c'holoi Hor Zalver.

Gwelloc'h ar garante 'vit tan,
'N oberou mat gwelloc'h 'vit gloan,
Meulomp ar verc'h karantezuz,
'N evoe true ouz mamm Jezuz.

Kanomp Nouel a galon vat,
Da dud an ti eur bloavezh mat,
Eur bloavezh mat digant Doue,
Hag ar Baradoz goude-ze !

Ton ar verzh-mañ hag hiniennou eus ar pozioù a zo enni a zo bet desket d'in gant va maeronez. Ar pozioù all am eus kavet e levr Loeiz Herrieu « De hortoz kreiznoz », « Nouel Berc'hed » a veze kanet gwechall e kêr Gastellin, derc'hent gouel Nedeleg, gant ar vugale o vont eus an eil ti d'egile da glask o delou mai.

Yeun ar Gow.

VA C'HORNAD KENTA

« Pemp kwenegad vutun, eur c'horn pri, eun tamm tan,
Hag eur pennad amzer da denna hoc'h alan,
Setu an eurusted emañ war an douar.
Ar butun zo d'am staoñ, gant e voged klouar
Hag e vlaz touellus, c'hwecoc'h eget ar mël ;
Heb eur c'hornad bennag ne 'z eus na sul na gouel ;
Zoken war ar pemdez, pa vez berr ar butun,
Eo tennoc'h al labour hag hirroc'h ar zizun. »
— Evelse e klevis o komz Lar ⁽²⁾ an Tevenn
O tont gant Fanch ar C'hamm eus marc'had Lesneven.
— Pouezit mat ho kerioù, dirag ar vugale,
Dougen a raint frouez, mat pe fall, hep dale.
— Petra c'hellen-me kaout ? D'an hirra tri-zek vloaz.
D'an oad-se goulskoude, d'am zoñj, me a oa gwaz !
C'hwi ive marteze ? Nag a lorc'h war hon tal
Gant hon nerz, hor galloud, hor gouiziegezh ; « padâl
Heb hon tad hag hor mamm d'hor gwiska, d'hor maga,
E vijemp chomet noaz hag heb eun tamm bara ».
— Meuleudi ar butun, graet evelse gant Lar,
E feiz, n'oa ket kouezet en eur skouarn vouzar.
« C'hwecoc'h eget ar mël « a zonjis, n'eo ket fall !
Me a zevfe butun kerkoulz hag unan all...
Va zad a zo er park, va mamm a zo er poull,
Me a zo mestr an ti, lezomp an traou da roull...
E korn al listrier, azioc'h an aoled,
Da c'horrenn e vutun, va zad a oa boazet ;
N'em boa eta d'ober nemet astenn va dorn,
Hag e paken e yalc'h, e zirenn hag e gorn.
Ar pezh a zo d'an tad a zo d'ar mab ive,
Hag hemañ ne laer ket, emañ war e leve.
Ne vern penaos, evit eur meudadig pe zaou,
Ar yalc'h o veza leun, ne vo ket bras ar gaou.
Eur pennadig goude, va fibenn entanet,
E raen tro al liorz en eur denna moged
A groge em gouzoug ken a vennenn moug,
Paouez gant ar butun a vije bet plega
Da guzul ar furnez ; hag an dra-ze, biken !
Soñjit mat ! gwaz e oan ! Va c'hornad a rafen.
Ar moged o tiskenn a roas d'in eur paz
Ne c'hellen ket terri hag a yae gwasoc'h-gwaz !
O krañchat, o tufa, va staoñ oa dizec'het ;
Abarz nemeur e oen dare gant ar zec'hed ;
Neuze eur c'houezenn yén a c'holoas va zal ;
Evit en em harpa e krogis en eur bal ;
Ha bremañ e welis ar bed a-bez o trei,
Evel m'em boa desket er skol : O Galiléi !
Eur vouez, oc'h ober goab, a lavaras : « Te wél,

(1) Lar, pe Brevalar (Brevalaire).

Eur bihennad vutun zo c'hwecoc'h eget mël ! »
N'em boa ket tañvet morse netra ken fall ;
An dour em gaoulagad en doa va laketañ dall ;
Kollet em oa va nerz, paour-kez traig zister !
Ken a zonjis kweza diwar va divesker...
P'en em gavis en ti, goude va fallaenn,
E voen digemeret gant son ar wialenn ;
Ha va zad, gant eur zell, d'am digoll eus va foañ,
A gemennas d'in mont da gousket hep va c'hoan.
Ar binijenn n'oe ket re galet, em eus aon,
Rak va c'hornad kenta en doa torret va naon.

Gwenael (Cozanet).



C'HOARZOMP

PER HA CHAN

« Pér ha Chan a oa en em dennet en o « reservation ». Euruz e vijent bet, ma karjent, met trouz a veze alies etrezo : « tamm feneant » en tu-mañ — « tamm gagn-goz » en tu-all... Ar gomz diweza goulskoude a veze atao da Jan. — Pér, pa veze skuiz o klevout rebechadou e wreg a jome en e wele... didrouz.

Eun devez o mab-bihan a deuas d'o gwelout.

— Pelec'h emañ tad-koz ? — Pelec'h emañ ? Oh ! an tamm feneant-se, pevar devez-so emañ aze en e wele.

— Klav eo ? — Oh ! n'eo ket. — Goulskoude, pevar devez-so... Ma e vefe marteze klask ar medisin. — Ar medisin ? D'ober petra ? da welout Yann oc'h ober e goloenn ? — Met marteze eo klav e gwirionez ; ma teufe da vervel e vo lavaret oc'h bet dibreder en e geñver hag e vefec'h tamallet. — Ma ! grit egiz ma karoc'h.

Ar medisin, pa deuas, a bignas war ar bank e tal ar gwele kloz. Teñval ' oa an ti, ha kaer en doa klask, klask dindan ar c'holc'hed-dindan pe klask dindan ar c'holc'hed-war-c'horre, den ebet na fiñve :

— Met emañ n'eus den ebet, a lavaras ar medisin, pe maro e rank beza sur-awalc'h !

— Oh ! n'oun ket c'hoaz » a lavaras eur vouez deut a zindan ar c'holc'hed.

Kerkent, Chan, tostaet ive euz ar gwele ha prest da respont e plas Pér, a youc'has :

« Ro peoc'h 'ta, tamm beg-bras ! ' michañs ar medisin a oar gwelloc'h egedout ! »

KEUZ DIWARLERC'H

Eul logodennig a biltrote, en deiz-all, war leurenn eun davarn.

Siouaz d'ezi, p'edo o vont d'an em zila en he zoull, e voe tapet, a-zibouez he lost, gant eur paotr fin, a oa eno o plapa banneou.

Kerkent e savas c'hoarz ha cholori etouez an everien : « E pelec'h emañ ar c'haz, a c'houlennas unan... »

« D'ar maro, d'ar maro, a grias an ostiz » en devoe aon e redje a nevez al logodenn d'he zoull. Souden eur marc'hadour gwin hag a voe eno, en eur c'horn tro, a lavaras da baotr al logodenn. « Ma lonkez anezi ez-veo, az pezo va auto. » Hemañ, goude beza graet eur sellig evit gwelet hag an auto a yoa, e-kichen an ti, ne jomas ket da varc'hata. En eur c'hinaouad hag eun astenn c'houzoug e lonkas al loenig paour, hep an distera pebr nag holen.

Ar marc'hadour gwin a jeñchas liou, met abalamour d'an testou a yoa dirazañ, ne gredas bet mont enep e o'her. Goulenn a reas hepken digant ar perc'henn nevez kaout ar vadelez d'e gas betek e gêr.

Buhez ar Bleun-Brug

Abaoe ar gelaouenn ziweza, en deus, ar Bleun-Brug, bevet devezioù pouezus bras evit an amzer da zont.

Devez bras ar yaouankiz e Landi.

D'an 28 a viz Du, hon eus bet e Landi pempvet devez a vignoniezh ar Bleun-Brug evit al lazou-kana, ar c'helc'hioù hag ar bagadou.

Eun daou c'hant hanter bennak a re yaouank en em gavas en deiz-se e Landi. An hanter muioù eget na soñjomp !

Da 10 heur e voe oferenn e chapel Itron-Varia Lourd. « Spered-Santel » e peder mouez, a zigoras an oferenn-se, gant Laz-Kana Landi renet gant an Aotrou Abjean. Goude al lizer-abostol hag an Aviel lennet e brezoneg gant V. Seite, an Aotrou Yvon Troal an oferenn, a reas eur brezegenn war an herez kristen ha breizat fiziet ennomp gant ar Sent o deus diazezet hor Bro war Iezenn-Veur ar C'hrist.

« Da Feiz hon Tadou koz », kanet warlerc'h a strakas evel eun testeni a feiz kreñv. Kantik ar Baradoz hon dibradas goude hag a reas d'eomp ankounac'h evit eur mare trubuilhou ar vuhez. Gant an « Adoromp holl » omp unanet gant ar beleg gantañ war an Aoter korf ha gwad Hor Salver. Kent kuitaat al lec'h santel e kasomp eur galv da Santez Anna hor Patronéz : « O Rouadez kaset an Arvor ».

Ha bremañ, holl da sal an oberou, da selaou an Ao. Derian rener kanerien Santez-Anna : « Pinvidigez dibar ar sonioù breizek », setu danvez e brezegenn.

En eur sal, kaiz re vihan siouaz ! e komzo e-pad eun heur hanter, hep skuiza dén. Gant an Ao. Derian emañ an « ober » da heul ar gomz. Komz a ra sklér, flour ha fentigellus. Kana 'ra evel eun eostig tonioù kaer Bro-Wened ha re-ail. Gant kalz a sao e lakas da skedi pinvidigez hor c'hantikou. Eun taol-micher eo bet prezegenn an Aotrou Derian. Evel ar gurun e strakas an daouarn da veuli ar prezeger.

Eur pred, kemeret a gevret en eur sal vras, a voe laouen kenañ. Ha yao goude, en eul lostad hir a girri-tan, re vihan ha re vras, betek maner Keryann, kavell ar Bleun-Brug.

Jos an Doare, madoberour brasa hon arz briezeke e Breiz-Izel, hor pourmeno dre ar maner en eur ziskouez d'an holl pinvidigez an « Azginivelez » e mein ar C'hastell. Gantañ e welomp an arz-se anvet « Renaissance » o c'henei eno, dres d'ar mare m'ac'h en em led er broioù all eus an Europ, hag oc'h en em skigna goude azalek Landerne betek Montroulez, en ilizou, er chapelioù, er c'hroazioù, er c'harnelioù, er c'halvarioù, er manerioù : Landerne, ar Merzer, Bodiliz, Landivizio, Lambaol, Sant-Thegoneg, Gwimilio, a dremen bep eil tro dirak hon daoulagad dre skeudennou dispar displeget dirazomp, rak gant Jos ivez, emañ an « ober » da heul ar gomz. Kentelius bras evit pep hini eo bet ar gaozeadenn-se. Bennoz Doue d'hor mignon Jos an Doare.

Sekretour ar Bleun-Brug, e sal vras ar maner, a sav neuze e vouez :

« Mignoned ker, tomm eo hor c'halon ouz ar maner-mañ, n'eo ket hepkén en abeg m'eo kaer, met dre m'eo bet kavell ar Bleun-Brug. An Aotrou Yann-Vari Perrot, a savas amañ ar Bleun-Brug kenta, hanter-kant vloaz a vo da vloaz... »

En eur gér berr e taolennas buhez an Ao. Perrot hag e klozas evelhenn :

« Bennoz Doue d'an hini a zo hag a chomo evidomp « Tad ar Bleun-Brug ». Deut eo ar c'hreunenn vihan en deus hadet, da veza eur wezenn vras a c'holo gant he bodou, Breiz-Izel a-bez. Evit kement-se n'en deus espernet netra, nag e arc'hant, nag e amzer, nag e boan, nag e wad zoken. Hadet en deus e-kreiz an daelou, hag emamp-ni bremañ oc'h eosti e-kreiz al levenez. »

Evit kloza an devez-studi-se, an holl en em gav bodet e ti all leanezed. Bep a vanne kafe tomm a ro tommder d'ar galon.

Loeiz Roparz, pignet war eur gador a zo en e wir wella. « Kan ha diskan » a red hag a strak eus an eil penn d'egile d'ar sal. Echu eur ganaouenn e kroger gant eun all... Bravo ! Bravo ! Loeiz !...

Dén ne c'houlenn diskregi. Koulskoude ret eo paouez. Gerard Pijon en deus ivez eun dra bennak, n'eo ket da gana, met da lavaret.

Eun doare kelc'h-studi, plijus-tre, a zigor neuze : Petra e tiefe beza eur c'helc'h-keltiek... Pehini eo kefridi yaouankizou Breiz... Petra 'ra ar muia diouer d'ar re-mañ... Setu aze menozioù hag a zo bet troet da distroet, ha re-all da heul.

Meur a hini eus tud ar sal a gemeras perz en diviz a voe da heul... Ar pez a fell d'ar re yaouank ? Beza kelennet war draou Breiz. Petra 'gavont evit-se ? Eur bern kelaouennigoù a netra, re gér o lenn holl pe skrivet en eur yéz ha n'eo yez dén ebet e Breiz... *Youc'hal a ra ar yaouankizou-se, e fell d'ezo eur gelaouenn vras, unan hepkén, unan hag a vo kelaouenn an holl, da zigeri sperejou an holl war gement a sell ouz buhez Breiz ; Breiz eviti he unan, ha Breiz e-barz ar bed a hirio. Ar gevredigez « Kendalc'h », emezo, eo a dlefe rei d'ezo ar gelaouenn a c'houlennont.*

Ar mennad-se a zo volet gant an holl a-unvan.

Kaset eo bet ar mennad d'an holl journalioù, d'an holl Guzulierien-Veur, Senedourien ha Deputeed.

Kenavo tud yaouank Landi, Ploueskad, Brest, Koatserho, Montroulez, Poul-laouen, Kastellin, Pont-n-Abad, Lokorn, Douarnenez, Gwengamp, Boulvriag, Pleuvihan, Lannuon, Gwaien, Plouedern, Spezet, Gwiseni, Landreger, St-Brieg, Kastel-Paol, Plougastel, Plouzeniel, Plougerne, Kistrebere'h, Naoned, Saillé, Guérande. Distroet d'ar gér, mirit en ho spered sklerijenn an devez-kaer-mañ, ha lakit ar sklerijenn-se, gant levenez ho kalon, da skedi war ho nesa.

Devezioù all ken laouen, a vo e Baod, Kernaskleden, Gwengamp, Douarnenez, Kastellin...

Bodadenn Bleun-Brug Landi.

D'ar sul warlerc'h 5 a viz Kêrzu edomp bodet adarre e Landi.

Da 10 h. 30, a-gevret gant an Ao. Pinvidic, Depute-Maer Landi hag e guzul, e voe diazezet dre vras Bleun-Brug an eured-aour, e Landi hag e Maner-Keryann.

E-lec'h ar sul genta a viz Eost eo bet dibabet, evit meur a ebeg, an 29-30 hag 31 a viz Gouere da lida Bleun-Brug 1955.

Lodennet eo bet goude e-tre pep hini, al labour da ober, evit ma teuo da vad ar gouelioù.

Bodadenn veur kuzulioù ar Bleun-Brug.

Goude kreisteiz, en hevelep sal an Ti-Kêr, ec'h en em vode kuzulioù Bleun-Brugou Leon, Kerne, Tregor ha Gwened.

Eno, en-dro d'an Ao. Fave, aluzener-meur, an Ao. Mocaer, is-rener, hag an Ao. Moal, penn-rener, ec'h en em gave an Ao. Ao. Langleiz ha Koue eus Gwened, Kadoudal hag Even eus Bro-Dreger, Herri Caouissin, B. de Parades, Y. ar Minor ha V. Seite, eus ar B. B. bras, an Ao. Duigou eus ar *Progrès*, hag an Ao. Ao. Sorgniard, Morvan, ha Merdy.

Unan eus pouezusa bodadejou evit amzer da zont ar Bleun-Brug eo bet houmañ.

Dirak eul labour bepred o kreski, eo bet divizet :

1° Feurmi eun ti e Kastellin, da rei d'ar Bleun-Brug eur greizenn.

2^e Rei d'an Ao. Seite, eur sekretour : Herve an Du, a grogo gant e labour e penn-kenta miz Genver.

Eun taol-lagad a zo bet roet, goude, d'al labour graet ha d'al labour da ober.

Sant Korantin e Koatkeo.

Da geñver 11^{vet} deiz ha bloaz maro an Ao. Perrot, ar Bleun-Brug, gant aotre an eskopti, a lavare evitañ eun oferenn e Koatkeo.

N'en deus ket klasket ar Bleun-Brug boda eur bern tud, met goulenn digant eun niver bras-beza, en deiz-se, unanet a spered hag a galon, er bedenn, gant ar re a vije o pedi e Koatkeo.

Ouspenn hanter-kant a dud e oamp eno e chapelig ar Werc'hez, deuet, evel ma lavaras ar prezege, « n'ouzoun ket pe da bedi evit an Ao. Perrot, pe da bedi an Ao. Perrot ».

Da 10 h. araok kregi gant an oferenn, e voe kanet kantik sant Korantin.

An Ao. Morvan Kollo, kure Plouvian ha bet kure e Skrignac, eo a lavaras an oferenn.

Lennadennoù ha pedennoù an oferenn a voe graet e brezoneg penn-da-benn gant V. Seite :

« Va breudeur, dalc'hit soñj eus ar re a zo bet laketa en ho penn da brezeg d'eo'h komzou Doue. Sellit penaos o deus tremenet o buhez, ha bezit eveldo leun a feiz... » (St Paol d'an Hebreed, XIII.)

« Den ebet ne elum eur goulou, evit e zerc'hel dindan ar boezel, met lakaat a ra anezañ war ar c'hantolor evit ma vo grêt sklerijenn d'ar re a zeuio en ti... » (St Lukaz, XI.)

... « N'am c'hollit ket gant an dud fall, o va Doue, na rit ket d'in evel d'an dud a gar laza, a zo leun o daouarn a dorfejou... » (Lavabo an oferenn.)

... « Ni ho ped da zigemer gant madelez an donezon-mañ a ginnig d'eo'h ho servicherien... Roit d'eomp ar peoc'h e-pad hor buhez, hon diwallit eus an daonasion eternel hag hon digemerit eun deiz etouez ho Sent, dre Jezuz-Krist hon Aotrou. »

... « Ho pezit soñj Aotrou, eus ho servicherien ha servicherezed, an Aotrou Perrot dreist-holl, a zo aet en hon raok gant merk ar feiz hag a gousk e peoc'h... Roit d'ezo eul lec'h a frealzidigez, a sklerijenn hag a beoc'h. Dre J. K. hon Aotrou. »

... « Hon Tad hag a zo en Neñv, pardonit d'eomp hon ofañsou, evel ma pardonomp... »

Evelse, pedennoù ha kantikoù a leunias ar chapel e-pad eun hanter heur.

Goude an Avel, an Ao. Kollo, a ziskouezas d'eomp gant komzou entanet, kalon vat an Ao. Perrot, hag e fealded betek ar maro, da venoz meur e vuhez « Feiz ha Breiz ».

Araok kuitaat ar chapel e voe kanet « Kantik Seiz Sant Breiz » bet savet gant an Ao. Perrot.

An holl, goude, en em vodas en-dro d'e vez evit eur bedenn ha kana ar werz a zo bet savet war e varo.

... « Aotrou Perrot karet, kouskit dinet'h, e peoc'h,
E skeud ar chapel-mañ ken kaer savet ganeoc'h.
Breiziz war ho roudou, a-vagad a gerzo ;
Ho puhez, ho maro, bepred o c'hennerzo. »

K E L E I E R

Eul levr nevez da veza moulet.

« E skeud tour bras Sant Jermen » eo an ano en deus roet hor mignon Yeun ar Gow d'al levr eñvorenou emañ o paouez skriva. Ouspenn pennadoù plijus diwarbenn doare-beva tud Pleiben e penn ar gantved-mañ, e vo kavet c'hoaz ennañ, kement-se holl war hed eun 250 pajenn bennak, darvoudoù-gou hag istorioù fentus ha dudius savet e brezonek gwevn ha digatar an tolead-se.

Ne vo ket lakeet al levr e gwerz el levrdiv. Rak-se e peder ar re o devo c'hoant d'e rakprena da skriva d'an oberour : Y. Le Goff, Keranna, Gouézec (Fin.). Kerkent ha ma vo bet kavet rakprenerien a-walc'h, war-dro eun 300 bennak, e vo embannet al labour ha kaset d'ar re-mañ dre ar post.

N'ouzer ket c'hoaz pegement e kousto pep skoueren : 7 pe 800 lur moarvat. Roet e vo diwezatac'h ar priz eeun da c'houzout.

Ar Grasou.

A drugarez d'al levrig « *Pedennoù evit eun noz-veilh gant eun den maro* », embannet, daou vloaz 'zo gant Yeun ar Gow, e vez kendalc'het gant ar c'hiz santel da bedi, e brezonek, evit ar re varo war ar varvskaoñ. 3000 skouerenn anezañ a oa bet moulet ha war-dro 600 a zo bet gwerzet betekhen. 100 lur eo ar pezh ha distaol a vez pa brener dek skouerenn war eun dro.

Evit kaout al levrig, skriva da Y. Le Goff, Keranna, Gouézec (Fin.), k. p. 12668-Roazon.

An eskopti a zo o nevez embann ivez 8 pajennad **pedennoù da lavaret dirak ar re varo**. Ar re holl a gar c'hoaz ar brezoneg a zo eun dever d'ezo goulenn eur bern eus al levraouigoù-se da ingala en-dro d'ezo. Her goulenn digant : Direction des Œuvres, rue Feunteunig-al-Lez, Quimper. 10 lur ar pezh.

An Aotrou Duine, beleg.

Gouelioù bras a zo bet e Dol, d'ar 5 a viz Kerzu, en enor d'an Aotrou Duine, da Geñver tregontvet bloavezh e varo. Bez ez eo bet ar beleg-mañ, unan eus desketa tud e amzer, war draou Breiz. Lezet en deus war e lerc'h skridoù pouezus, darn anezo diembann. Dianavezet e-doug e vuhez, deuet eo da veza brudet bras goude e varo. Pennadurezioù brasa ar vro a oa d'ar 5 endro da Vaer Dol evit enori ar skrivaniere gouizieker m'eo bet an Ao. Duine. Ar Bleun-Brug n'edo ket eno, met ezel e oa eus ar c'huzul a enor savet evit aoza ar gouel-se.

Ganet e Dol, marvet eo bet aluzener al liseou e Roazon d'ar 6 a viz Kerzu 1924, ken paour ma ne chome ket war e lerc'h peadra a-walc'h da gas e gorf d'e gêr c'hinidik.

Hirio an deiz, Dol a zo lerc'h bras enni oc'h embann ez eo an Ao. Duine unan eus he zud vrasa. Eur skrid war ar vein gallet hen digaso da soñj d'he bugale da zont.

Stag e oa kalon an Ao. Duine ouz kêr e gavell. D'an Ao. Bénard, an hini a brezegas d'an oferenn-bred, d'ar 5 a viz Kerzu, e skriva daou vloaz araok e varo : « *Pa'z eoc'h e barz va Iliz-Veur, grit eur bedenn evidon da I. Varia Dol, ar hini a zo e korn aoter ar Werc'hez. En eur sellet ouz ar vein doujet-se, sonjit pegement o deus warno paret va daoulagad.* »

Skol dre lizer.

Le Télégramme, l'Ouest-France, Les Nouvelles, La Liberté du Morbihan, ar C'hourrier, ar Progrès, Semaine Religieuse Kemper, Le Paysan Breton, La Bretagne à Paris, La Croix de Bretagne, La Terre Bretonne, Ar Soner, Le Sentier, War-raok, Radio-Kimerc'h, Radio Rennes, o deus komzet eus hor *skol dre lizer*. Bennoz Doue d'ezo. Warlerc'h ar pennadoù-se ez eus deuet d'eomp 102 lizer da c'houlenn kenteliou. Darn eus al liziri-se a zo plijus kenañ. Pennadoù a roimp anezo.

Pebez tristidigez !

Ya pebez tristidigez gwelet ar reuz a ra en hor bro an evachou milliget ! Sonjit 'ta emañ ar Morbihan er penn kenta tout, er Frañs, evit niver ar re a varv diwar ar boeson ; da eil emañ ar « C'hôtes-du-Nord » ; an « Ile-et-Vilaine » da bevare, warlerc'h an « Orne », hag ar Finister da c'houec'hvet, goude ar « Mayenne ». Eur vez eo !

Gwelloc'h e vefe d'ar journaliou, e-lec'h displega kement a dorfejou, evel ma rc'ont, embann breizenn pennaou a eneb a evachou daonet. Anez da-se emañ brein hor bro.

F. C. B.

Evit ar brezoneg er skol hon eus bet 5.000 lur digant ar « Fédération des Sociétés Bretonnes de la Région Parisienne ». Gant an arc'hant-se hon eus prenet 50 « Le Breton par l'Image » hon eus kinniget : 25 da skol Sant Joseph, e Landivizio, ha 25 all, da skol Sant-Salver e Redon.

D'an 2-12-54, hor c'hof « evit ar brezoneg er skol », en deus bet 100.000 lur digant an F. C. B. Eus ar som-se hon eus roet 50.000 lur evit prena 500 Levr « ar Bozec » da ingala e skolioù kristen ar G.-d.-N. Kinniget hon eus ivez d'ar re-mañ, 200 « Le Breton par l'Image » eus ar 700 hon doa dija prenet. Karget eo an Ao. Kadoudal da ingala al levrioù-se. Moullet hon eus ivez 3.500 levrig, ennañ kenstrivadegoù B. B. 1955, da ingala er skolioù.

Diskou brezonek.

Da laouenaat gouelioù Nedeleg e c'hellit prena digant Wolf, 6, rue Astor, Quimper, diskou brezonek, kanet *gant kanerien Landivizio* : Spered Santel ha Luskell va bag ; An tri Angelus ha bannieloù Lambaol. — *Gant Kanerien Santez-Anna-Wened* : Kemeromp an hent treuz hag Er rah koed ; En hou' kavell hag Er meul bras ; Ni ho salud ha salud Breiziz. — *Gant Zaig Monjarret* : Kendalc'homp ha koulsk Breiz-Izel ; Bro goz ha Tuchant e arrio en hañv ; An hini a garan hag an Ter seien ; Ar Baradoz ha lavaromp ar chapeled. — *Gant Haas* : Bro goz hag ar Pilhaouer ; Martilin an Dall hag Hirvoudou ; Va zi bihan hag Anjelus pask. — Bez ez eus ousspenn *diskou bombard ha biniou* gant bagadoù Koad-Serc'ho, Kemper, ar Vilin-C'hlas, ha *sonerien o unan* evel Roparz ha Bodivit ; Gwegen hag Henaff ; Polig ha Gwernig, Dorig ha Polig.

Petra eo ar C. E. L. I. B. ?

C.E.L.I.B. = Comité d'étude et de liaison des intérêts bretons. 44 senatour ha depute, renet gant Pleven, a zo er strollad-mañ hag eur bern tud all evit o harpa. Eur journal o deus : *La Vie Bretonne*, C.E.L.I.B., 3, rue du Départ, Paris (14^e). C.C.P. 295.41 Rennes. 8 numéros : 200 lur. Mar fell d'oc'h gouzout al labour vat a ra ar re-mañ, goulennit ar journal.

En niverennoù diweza e teskomp ez eus e Breiz ousspenn 500 kuzul parrez hag o deus votet beza ezel eus ar C.E.L.I.B.

Eo deus ar C.E.L.I.B. a benn da izelaat a 40 % priz an trefi evit kas en diavez Breiz ar brikoli hag ar c'haol-poume.

Kement tra a sell ouz buhez Breiz eo tra ar C.E.L.I.B. : labour-douar, pesketerezh, ijinerezh, kenwerzouriezh, sevenadurezh, yec'hed...

Dre ar C.E.L.I.B. eo ez eur deuet a-benn da lakaat ar brezoneg er skol.

Dre ar C.E.L.I.B. eo e teu d'eomp an aotre bep bloaz da gestal evit ar brezoneg.

An F. C. B. n'eo nemet « komision sevenadurel » ar C.E.L.I.B. renet gant an Aotrou Toulemon.

Lennit eta « *La Vie Bretonne* », kazetenn ho tifennourien.

Nag ar zarvoudou spontus war an henchou.

Skoet e vezer bemdez gant niver ar gwall zarvoudou a erru war an henchou. Ar mekanikerezh a goust kêr da vuhez mab-dên. Marteze e vije mat d'ezañ ober ar bedenn-mañ, anavezet mat en U.S.A. hag er C'hanada, araok kregi bep mintin e rod-stur e garr-tan :

« Aotrou, roit d'in eun dorn start hag eul lagad lemm evit ne c'hloazin dên ebêt pa vezin o vont dre an hent.

« C'houi hoc'h eus roet ar vuhez. Ho pedi a ran da viret ouzin da lemel pe da foeltra an donezon-se hag a zeu ac'hanaoc'h.

« Diwallit, Aotrou, ar re a vez ganin, diouz an tan ha pep droug all.

« Deskit d'in en em servicha eus va c'harr-tan, evit ezommou ar re-all.

« Mirit ouzin da vont re-vuan, dre garantez ouz kaerder ar bed hoc'h eus krouet, evit d'in da c'hellout gant levenez ha lealded, mont gant va hent. »



KEGINEREZ

Penaos ober pudding

Setu penaos e vez graet pudding em familh pep bloaz da vare Nedeleg abaoe ousspenn 60 bloaz. Un tamm mat a basianted a zo ret evit e aozañ, lipous kenañ eo avat pa z'eo bet poazet mat ha tanflammet gant rom. Evit ma vije a-walc'h da ze bri evit eiz pe zaouzek den setu amañ petra zo ezomm :

1 volennad laez (ur c'hard litrad) — 250 gram sukr — 250 gram rezin Malaga — 125 gram rezin Korint — 4 pe 5 troc'hen oranjez ha sitroñs konfizet — 25 pe 30 gram mel-askorn bevin — 100 gram amann — 250 gram minvig bara diazez — 3 vi — 2 loaiad bleud gwinniz — 2 loaiad vras rom.

Foetit gwenn ar viou d'ober erc'h. Lakit da viryi al laez gant ar sukr ebarz. Bruzunit munut ar bara. Skuilhit al laez war ar bara en eur bodez ha meskit ; da c'houde lakit er bodez ar rezin hag ar c'hroc'hen frouez konfizet trouc'het munut, ar mel bevin drailhet, ar melenou vi, ar bleud, ar gwennou vi foetet d'ober erc'h hag ar rom. Lardit ur gastolodenn pe eur moul (m'ho peus eur bodez potin e vo gwelloc'h c'hoaz) gant amann ha lakit ebarz ar boued mesket en e bez. Lakit da boazañ e-pad teir eurvez en eur forn gant tan goustadik pe er « bain-marie » da genta ha d'ar forn da echui.

Pa 'z eo poaz, tennit ar pudding diouz ar forn. Divoulit pa 'z eo klouar, lakit sukr poult ar c'horre, skuilhit rom warnañ araok servijout ha lakit tan ennañ pa vo ar pudding war an daol.

S. D.

N'eus ket a gelaouennou brezonek ?

Setu amañ roll ar c'helaouennou-se :

1^o E brezonek hepkén :

1. — *Bleun-Brug* : ar gelaouenn vrezonek ar muiad lennet.
2. — *Barr Hol*, kelaouenn B.B. eskopti St-Brieg : Per Even, 18, boul. Clémenceau, Guingamp. C.C.P. 508-07 Rennes : 200 lur.
3. — *Pedenn evit ar Vro*, kelaouenn Unvaniezh Speredel Vreiz : Abbé Le Floch, 5, rue des Capucins, St-Brieuc.
4. — *Skol*, eun niverenn bep tri miz : Koum. 400 lur : Abbé A. Le Calvez, Skol Sant Erwan, Plouezec (C.-du-N.). C.C.P. 863.85 Rennes.
5. — *Skol-hañv*. Bep tri miz : Mme de Bellaing, Le Yaly, Guingamp. C.C.P. 1261.34 Rennes.
6. — *Al Liamm*. Kelaouenn lennegel evit ar re n'o deus ket aon rak ar brezonek diés. Bep daou viz : 1.000 lur. P. Le Bihan, 13, route de Vaugirard, Meudon (S.-et-O.). C.C.P. 5349.06 Paris.
7. — *Hor yezh*. Bep tri miz. Brezoneg al Liamm. Koum. 500 lur. P. Denis, Le Ris, Douarnenez. C.C.P. 1499.51 Rennes.
8. — *An Had*. E yezh Gwened. Bep daou viz. Koum. 300 lur. Stén Kidna, 5, rue du Drezen, Auray (Morbihan).

2^o E brezoneg hag e galleg :

9. — *Liziri Breuriez ar Felz*. Chancine Grill, impasse de l'Odé, Quimper.
10. — *Bro Guened*. Kelaouenn B.B. Bro-Wened. Bep miz. Abbé J. Le Palud, 6, rue de Rosmadec, Vannes. C.C.P. 1158.46 Nantes. Koum. 300 lur.
11. — *Sked*. Bep an amzer. 100 lur an niv. P. Keraod, allée du Bel-Air, Clamart (S.).
12. — *Ar Falz*. Kelaouenn ar Skolaerien L.L. Provision : 500 lur. Ar Falz, B. P. 19 Brest. C.C.P. 430.20 Rennes.
13. — *Ar Vro*. Kelaouenn nevez, embannet gant al Liamm, Mlle St-Gal de Pons, rue des Salles, Guingamp. C.C.P. 519.40 Rennes. Koum. 350 lur (bep daou viz).

3^o E galleg dreist-holl, pe e galleg hepkén :

14. — *Le Courrier et Le Progrès*. Bep sizun. Koum. 500 lur. 8, rue des Gentilshommes, Quimper. C.C.P. 139.64 Nantes.
15. — *Ar Soner*. Bep miz. Koum. 500 lur. B.P. 25 Quimper. C.C.P. 56.64 Rennes.
16. — *La Terre Bretonne*. Bep sizun. Koum. 600 lur. C.C.P. 8301.85 Paris.
17. — *La Vie Bretonne*. Journal ar C.E.L.I.B., 3, rue du Départ, Paris (14^e). Bep tri miz. Koum. 200 lur. C.C.P. 295.41 Rennes.
18. — *Breiz Santel*. Bep miz. Mouvement pour la protection des Monuments religieux. Koum. 100 lur. M. de Beaufond, Vannes. C.C.P. 1536.85 Nantes.
19. — *Fontaines de Brocéliande*. Bep miz. Koum. 300 lur. R. Pichery. C.C.P. 976.91 Rennes.
20. — *Bretagne réelle*. Bep miz. Koum. 400 lur. Quatrebœufs, C.C.P. 75.482 Rennes.
21. — *Le Pays breton*. Bep tri miz. Teir yezhek. Koum. 300 lur. J. Choleau, 21, rue Saint-Louis, Vitry. C.C.P. 58.52 Rennes.
22. — *La Bretagne à Paris*. Bep sizun. Koum. 720 lur. Boul. des Champs-Élysées, Paris. C.C.P. 5616.09 Paris.
23. — *War-raok*. Kele'hioù Loire et Vilaine. Bep miz. M. Pineau, Aven, l'Allali, La Baule (L.-I.).
24. — *Ar Bed Keltiek*. Moulet e Bro Eire.
25. — *O gam*. Tradition celtique, 2, rue Léonard-de-Vinci, Rennes. Koum. 1.000l.
26. — *Les Cahiers de l'Iroise*. Brest.

Klevet a rit ! 26 kelaouenn pe kazetenn, e brezoneg pe e galleg diwarbern Breiz. Eur berniad eo neketa. Eur c'hodellad vat a arc'hant e koustfe d'an hini a garfe o 'enn holl. Eur merk anat eo ivez eus si a-viskoaz ar Getted : an dizunvaniezh. Ne lavaran ket ne dlefed ket kaout e Breiz ousspenn eur gelaouenn ! 26, avat a zo re. Kalz re ! ne gav ket d'eoc'h ? Marteze avat e ve tu d'en em glevet, endro da 4 pe 5 kelaouenn.

Bleun-Brug bras Landi

a vo lidet d'an 29, 30, 31 a viz Gouere
evit enori hanter-kantvet bloavezh
ar Bleun-Brug
bet savet e Keryann-Sant-Nouga
gant an Aotrou Yann-Vari Perrot.
Nozvez ar sadorn 30, a vo e Keryann.



An Aotrou Kardinal Roques,

Archeskob Roazon,
en deus asantet dont da Landi
da rén eured-aour ar Bleun-Brug.



Ar Bleun-Brug o kreski dalc'hmat

Diwar deiz kenta' r bloaz, ar Bleun-Brug en devo eun eil sekretour
da sikour Visant Seite : an Aotrou Herve an Du.

Eun ti, e Kastellin : Roz-Bleunioù, ru Graveran, a zo bet feurmet
evit beza **Ti ar Bleun-Brug**. Peder sal a zo ennañ ; d'an traoñ : eur bureo
hag eur gegin. D'an nec'h : diou gambr.

Gwas pezh a zo, mankout a ra en ti, arrebeuri ha pep tra.

Eur galv a reomp d'hor mignoned evit ma kasint d'eomp (V. Seite,
Bleun-Brug, Châteaulin, Fin.) **ar pezh o defe a re en o zi, hag a c'hell-**
fent da zioueret : arrebeuri binvioù-kegin, listri-taol, pallennou, liñse-
riou, fornigell-gaz, tommer-gaz, binvioù sklerijenna... ha kement tra
talvoudus war-dro eun ti. Skrivit d'eomp araok.

Evit ma vo Ti ar Bleun-Brug ho ti ive, deuit war hor sikour ! Doue
ho paeo.

Goulennit diganeomp levrig « **Kenstrivadegou Bleun-Brug 1955** »,
da ingala er skolioù, evit netra.

Klaskit d'eomp bugale ha tud yaouank da gemer perzh en hor
c'hoñkourioù.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697





An Aotrou 'n Eskob **TIRILLY**, Eskob nevez enezennou Markizez, sakret e Kemper d'an 28 a viz Du,
gant an Ao 'n Eskob **FAUVEL**,
en e gichen, an Ao. **ROUSSEAUX**, Eskob Laval, hag an Ao. **ROY**, Vikel Abostolik an A.O.F.
Unan war 12 eus holl visionerien ar Bed a zo eus Breiz.

Gliché : *Courrier et Progrès*.

PHOTO LE GRAND QUIMPER